

HISTOR

SANT TANGUI ha SANTES HEODEZ

SENT KARET PARESSIONIS LANDUNVEZ

Ton : *Rouanez Arvor, oll o saludomp.*

An nep a vezo devot d'ar Verc'hez
A ielo d'an Env da fin he vuez.

E peb korn a Vreiz ez 'eus chapelou,
D'en em erbedi ous Mam hon Autrou

Ni, Landunvezis, on eus an henor
Da gaout unan gaër var ribl hon Arvor.

Eun histor guirion a rei da entent
'Vit peseurt rezoun eo hanvet Kersent.

Er c'huec'hvet kanvet, e kear Tremazan
Ez 'oa kastel koant, dijentil ennan.

Eno daou bried a veve euruz,
Dre m'oant ho daou douget dar vertus.

Galon, Florenza, nobl e peb feson,
A ioa brudet bras, evel var un tron.

D'eo kals bugale Doue a roas :
Tanguï, Heodez, dreist oll a skedas.

Eun dudi oa klevet Florenza
O rei d'eo kentel var an traou guella.

An Elez, me gred, renket en dro d'e,
A zilaoue gae kenteliou an Ee.

Mais var an douar n'eus netra padus,
Den e guirionez n'eo aman eürus.

Introun ger Galon a varvas abred,
Kuitat a rankas bugale, pried.

Bugaligou geiz, Tanguik, Heodez,
Piou zesko brema d'eoc'h ar guir furnez ?

Allas ! c'hui, assur, o peus great koll bras,
Ho kalon a glem evel klem ar glas.

Evit peurvalheur, ho tad goudeze
D'un itron difeiz prest a zimeze.

Al lesvam fallakr, kris ha dinatur,
Oc'h ober an drouk e doa plijadur.

Er maner n'oa kent nemet karantez,
Eus brema fulor ha tristedigez.

Bemdez goal gomzou a veze klevet ;
Bemdez goal daoliou a veze skoet.

Kaër en doa Galon gourdrous e bried,
Hi a gounnare 'vel un droug-spered.
Goulscoude, Tangui, o c'houzaon deut skuis,
Gant asant e dad a ieas da Paris.

Mais piou lavaro pebes disparti
Oue 'tre Heodez ac e breur Tangui !

Kemesk a rejont ho daëlou, ho foan,
Ha kimiada e kreis ar goelvan :

« Kit, va breur Tangui, lavar Heodez,
Avoalc'h eo d'in me kaout goal vuez. »

Tangui ioa den kaër, nerzus hag hardis,
Digemeret mad e oue e Paris.

Brud e lealdet a ieas d'ar Roue
Hag en e balez prim hen reseve.

'Pad an amzer man, he c'hoar Heodez
E doa muioc'h mui poan hag enkres.

Evel eur vates e ranke skuba,
Goalc'hi, ag ober an traou distera.

Hag ar verc'h santel, ken sentus bepred,
Ous urchou direiz ne argile ket.

He gened dispar, he furnez brudet
Zouge dijentil d'he goul da bried.

Nan, nan, Heodez da Jesus hebken,
'Zo en em voëstled evit birviken.

Al lesvam jalous o velet he brud
A zounjas e c'has eus maner e zud.

Diou leo ac'hano, an nobl Heodez
Labouras laouen 'vel devechourez.

Ouspen ar verc'h vad gave amzer c'hoas
Da zikour ar paour hag ar c'hlanvour keas.

Etretant Tangui a reas un droad
E kear Tremazan evel divroad.

Er zal a honor e oue resevet
Mais 'vit azeza ne asantas ket :

« Heodez, emean, guelec a garjen,
« Laret dei eur ger, m'ho ped d'he goulen. »

Kerkent al lesvam hen tennas a guz
Hag eus Heodez gountas traou euzus :

« Ar plac'h se, emei, zô eur plac'h kollet,
Diou leo ac'halen on eus he c'haset. »

O klev kement-man eo mantret Tangui ;
Ractal ma en hent ; he c'hav o c'hoalc'hi.

« Heodez, va joa, va c'her Heodez,
« Deut, ha merkit d'in eur guir garantez. »

Pa gleo ar vouez se, n'e anavez ket
Heodez a dec'h, rag m'ar z'eo spountet.

Ha Tangui a gred eo coupabl neuse,
He foursu, he sko gant un taol kleze.

Kerkent m'eo gantan great e dorfet
En dro d'ean kals tud zo en em vodet.

« Ar plac'h peus lazet, dijentil iouank,
« A ioa eur plac'h fur e peb gis, eb mank ;

« En hon touez aman rea levenez
« Rag ma z'oa dous, leun a garantez.

« Ar beorien dreist oll a geuzo d'ezhi
« Dre m'o doa sikour bepred diganthi.

« Gant eur vam fallacr eo bet bourrevet
« C'hui oc'h eus brema ar chrim achuet. »

An dijentil keas, pa gleo an traou-ma,
Zantas e galoun enghan o ranna.

Distro dar maner, he hano laraz
He dorfet de dad kerkent anzavaz.

Tud oll Tremazan a ioa glac'haret,
All lesvam ebken e doa joausdet.

Mais en un taol count, ha dre vuzud bras,
Eno Heodez en em ziskuezas.

Oll ous e guelet a oue seziet,
Hag hi d'he lesvam e deus lavaret :

« Bar eo ar muzul eus oc'h oll grimou
« Ha souden Doue a skoi e daoliou. »

Ker buan al lesvam skrijus oe skoet,
Gant un tars kurun e oue pulluc'het.

« C'hui, va breur Tangui, eme ar zantes,
« O peus o pardoun a bers ar Verc'hez.

« Me evidoc'hui em eus he fedet
« Ha d'eus e ginou gras em eus klevet ! »

Tangui n'em strinkas da dreid e c'hoar,
A ziskuezas keus hag eur guir glac'har

Neuze Heodez oue sakramantet
Ha ractal en Env e oue kurunet.

Anterret eo bet korf ar santes-ma
E bourg Landunvez gant enor vrassa.

Sant Paol ioa neuse eskop e Leon
Tangui reas dezhan e gonsession.

Eur binijen rust Tangui resevas
Hag a galoun vad kerkent her greas.

En em denna reas epad daou-ugent de
En eur c'hoad distro, en eul leac'h goue.

Eno dre ar iun, ha dre ar beden
Reas eus e bec'het eur guir binijen.

Distro da Gastel, neat he galon,
E zeas da vanac'h gant eur joa guirion.

Ker santel e oue e Piniti Batz
M'en savas sant Paol en huella plas.

E penn abati Plouneour-Menez
Sant Tangui renas ar rest eus he vuez.

Bemdez e vertus a ieas var startaat,
A gant an Ælez oue bisiteat.

Gant e vadou bras Tangui zao goude
Tre e penn ar bed ti kaër Locmaze.

Eno gant menec'h klevet deis a noz
Meuleudi Doue, kan ar baradoz.

Relegou ar sant de di Locmaze
Devot oue douget pa nijas d'ann ee.

Kerent sant Tangui, santes Heodez
O deus savet prest eur chapel nevez.

Hanvet eo Kersent gant-tud Tremazan
'Vit dere'hel sonj vad euz an daou Sant-man.

Da Vam ar Salver e zeo konsakret
Evit ar grasou e deus deo roet.

Evel sant Tangui, santez Heodez
Bezomp devot bras ato dar Verc'hez.

E Kersent emam mam ar vir-zikour
Ganthi e vezimp treac'h d'hon enebour.

Lesvamou, evez ous goal deodadou
Ma fell deoc'h mont un deis dan Envou.

Bugale, var skouer santez Heodez
Deskit bea sentus ha leun a furnez.

M'hon eus ar malheur da bec'hi grevus,
'Vel Tangui renomp buez piniennus.

Neuse a dra sur da fin hor buez
E vezimp douget da vro an Ælez.

PERMIS D'IMPRIMER :

14 décembre 1887.

SERRÉ, pro-vic. cap.

Kemper, moulet e ti Ar. DE KERAXGAL.

par M. Agrall
Ancien vicaire de Reyben.